

Quellien Narcisse (Ar Roh-Derrien 1848 – Pariz 1902)

Annaig (bet embannet e 1880)

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Faziou kemmaduriou a zo er skrid orin. Ha ne oar ket Quellien ober gand ar rannaouigou-verb **a** hag **e**.

Anad eo e ouie Quellien gwelloc'h ar galleg eged ar brezoneg.

Notenn gand “Embann an Hirwaz : Tu a zo d'en em houlen ha lennet e oa bet ar “barzonegou“-ze gand Ernest Renan ?

Taolenn

A M. Yves-Marie Gélard

Eur pennad e galleg gand Ernest Renan.

Kovesion

Annaig

Steredenn ar Hoz-Yeoded

Pardon Sant-Trevez

D'ar varzed euz ar Hreisteiz

Ar beorien

Kanaouenn evid diou vouez

An disparti

Lizer evid e hoar

Eur zell diwar-lerh

Diwar-benn eur hi

D'eur henvreur

Ar bloavezh triweh ha tri-ugent

Karr an Ankou

Diougan

Lizer euz ar gêr

Ma halon a Vreizad 'zo leun a velkoni

Noluit consolari

An amzer da dond

An angelus

Gousperou an anaon

A M. Yves-Marie Gélard

Un jour, quand vous aurez connu cette vie
Et les tendres désirs et l'âpre volupté,
Quand vous saurez le deuil dont la joie est suivie,
Vous verrez, mon ami, que tout est vanité.

Pour moi, comme un ermite en son bois solitaire
Repentant du bonheur d'un jour sans lendemain,
Le monde autour de moi peut s'ébattre ou se taire :
Je ne détourne plus la tête en mon chemin.

Et mon glas peut sonner. Je n'ai maudit personne
Pour les regrets sans fin dont j'ai souffert tout bas :
Dieu me rende en pitié le pardon que je donne
De ces coups dans le cœur dont on ne guérit pas !

Comme vous, j'ar rêvé que la vie était belle,
Aux jours où je croyais encore à l'avenir...
Mais qu'on me couche au moins, là-bas, tout auprès d'elle
Pour vivre ce n'est pas assez d'un souvenir.

N. Quellien

Paris, 30 juillet 1879

Cher Compatriote,

Ainsi, grâce à vous, notre cher pays de Tréguier aura son poète ; et les chants que vous avez au cœur, c'est dans notre vieille langue bretonne que vous voulez les dire d'abord. Vous avez bien raison. La poésie est chose du passé ; il est des temps où mieux valent les morts que les vivants, et ceux qui ont un pied dans la tombe que ceux qui naissent. Un idiome a toujours assez vécu quand il a été aimé et que de bonnes études philologiques ont fixé son image pour la science, comme un fait désormais indestructible de l'histoire de l'humanité. Les poètes et les philologues m'apparaissent comme les embaumeurs des langues. Leur approche paraît de funèbre augure ; mais ils conservent pour l'éternité. Chantez donc, cher Monsieur Quellien, chantez harmonieusement dans notre antique dialecte celtique, pour qu'un jour on dise de lui : « Il disparut selon la loi de toute chose ; mais comme il eut de doux accents avant de mourir ! »

Votre très affectionné,

E. Renan

Notenn gand “Embann an Hirwaz”: Petra 'lavarfe bremañ Ernest Renan, p'ema ar zaozneg ar yez etrebroadel.

Kovesion

Al leor-mañ 'm-eus skrivet 'balamour war be'
Evid ar re varo vez skrivet *in pace* ;

Hag-henn 'm-eus skrivet c'hoaz, evel ar re doaniet¹
Gand koun d'o flijadur en amzer dremenet ;

Hep kounnar na gwad ruz em liou 'm-eus skrivet c'hoaz
Gand daerou ha keun stard d'am yaouankiz, siwaz !

Nag hirvoudi na ran, na goulenn nep true' :
Dre ma youl on gwallet, ha dre youl vad Doue.

'Vel eur fubuenn noz, devet he diou askell
Ouz ar goulou-resin, a gouez er fornigell,

Re dost am-boia gwelet eur steredennig kaer
'Kreiz ar brug, 'n aod Arvor, pa oan-me c'hoaz er gêr :

Lagad glaz, bleo melen evel soul er parko',
Plah vrao 'oa Annaig ha rouanez ar vro ;

Dirag ho rouanez 'vel ra ar zujedi,
Me 'zo 'n em daoulagad evuruz diraki.

An hini a hoanta hag ar muia-karet,
Evid karantezuz, allaz ! ne laran ket.

Klevet em-eus penaoz e virer da viken
Demeuz eun dousig-koant ar hoanta c'hoarzedenn,

Eur hoarzedenn lirzin 'leh eur walenn eured,
Ar garantez pa'z a kuit a-raog ar hened :

N'ouzon pe on chomet heñvel ouz Annaig
Gand he sellou kañvuz ha fêzuz eun tammig ;

'Vel ar pesked er mor 'barz ma halon e-leiz
Eo chomet an eñvor outi hag ouz ma Breiz.

Eur pehed marteze neza bet ken euruz
Ha 'vo red din ober eur binijenn boaniuz :

N'eus forz, gand ma breudeur gristen 'n o fedennou
Ma houlenfont 'vidon ar heun d'am fehejou ;

¹ ar re doaniet : tregerieg : ar re zoaniet ; ar re o-deus doan.

Ha Doue d'am miro ; n'am-eus glahar ebed ;
Ha ma tigorfe c'hoaz ar baradoz kollet,

Evel ar ouizien wir evid o rouanez
'Vijen c'hoaz daoulinet dirag Anniag kêz.

Annaig

Pa oan e kêr ar Roh,
Yaouank ha leun a loh,
E kêr ar Roh,

Anavezen diou verh kaer,
Unan 'vel ar roz-êr,
Diou verh kaer,

An hini yaouanka
Koantoh 'vid ar hoanta
Ar yaouanka

Naig, eun heizez flour
Er hoajou, traou² an dour.
Eun heizez flour.

Etre ar merhed kêz,
Pa'h ee o mamm e-mêz,
D'ar merhed kêz ?

Me 'lenne eul levr brao
Etre an êligo'³
Eul levrig brao :

« Danvez mab ar Roue
Hag e goantiz ive',
Mab-kaer 'r Roue.

Muntret er garreg-korn⁴,
Int kousket dorn-ha-dorn
Er garreg-korn. »

Hag e ouelem neuze ;
Annaig marteze,
Hi ne ouele ;

Soñj am-eus e savas,
H d'an neh e pignas
Kerkent 'savas :

Ar glujar 'nij d'ar hoad
Pa vez gwallet ervad,
A guz er hoad,

'Leh dond tu 'r chaseer

² traou : tregerieg : traoñ.

³ êligo' : êledigou.

⁴ er garreg-korn : beg-douar.

Evid mervel e-berr
Tu 'r chaseer.

Er Roh, pa oan yaouank
'C'hoarzen ha gouelen stank
Pa oan yaouank.

Steredenn ar Hoz-Yeoded

Pa zav an noz teñval
War ar lor o youhal,
A-raog ma strak ar groz⁵
E kan an eostig-noz.

Diwall da vag ha da rouejou
Ouz hent avel 'kouez an Ankou,
Pesketaer koz, rag eo kuzet,
Kuzet steredenn Koz-Yeoded.

Me 'glev, pa zav an noz,
Pa zav euz tu Bro-Zaoz,
Klemm eul lestr o veuzi :
Peder oll, Breizidi.

Diwall da vag ha da rouejou...

Noz dall. Ouz treid ar groaz
Sell, pa lamm ar mor braz,
Eur verh, eun êlig gwenn
Gwenn hag he bleo melen.

Kemer da rouejou ha da vag,
Pesketaer laouen, ha distag⁶ :
Eun oabl splann bremañ 'zo savet,
Steredenn goant ar Hoz-Yeoded.

⁵ ar groz : an amzer fall-spontuz.

⁶ ha distag : kee pelloh war ar mor.

Pardon Sant-Treueur

I

Rañ-tañ-plañ, rañ-tañ-plañ « Tud vad,
Adaleg ar Roh bete Prad,

Euz ar beure an aotrounez veur,
Disul ‘mañ pardon Sant-Treueur :

C’hoari e peb doare ‘vo greet,
Nemed gourennou ne vo ket,

Er bloaz-mañ ne vo gourenn,
Se ‘lak lahadeg ‘barz ar vro. »

Evel-se an tabouliner
‘Embanne e Roh d’ar gwener ;

Hag o vousec’hoarzin er marhad
Ar mêziad a ree serr-lagad⁷.

Ar zul war-lerh, heol splann ‘velkent,
Ha tud hag heol e-leiz an hent ;

Dre ar prajou war ar hlazenn,
Merhed, paotred hag harserien ;

Ha c’hoari-vaz dre ar prjou,
M’hen lavar, nemed gourennou ;

Ha d’ar jabadao gand ar foultr
‘Teuent en-dro evel ar poultr :

Ken ‘oa mezo al lamperien,
Ar biniou pe e berhen.

Euz a Zant-Treueur daou-ha-daou
‘Tistroont gand bleuniou ar gaou :

Bleuniou hañv ouz o zavañcher
Hag en o halon ar gevier ;

Berroh ‘vid ar bleuniou, paotred,
‘Pado karantez ar merhed.

II

⁷ serr-lagad : lagad-luch.

Paotr ar gward 'houlenne emberr`
Tost d'an Ti-Poaz digand eur houër :

« Ar maout-se, peleh 'fel dit kas
Ouz e gerniou ruz-gwenn ha glaz. »

Evid eun eured 'vo red kaoud
Da bred warhoaz eur haer a vaout. »

« Da loenig n'a ket d'an eured,
Da leur 'r pardon ne laran ket. »

« Da leur ar pradon 'an marteze,
Ha mar kerez dond 'weli ze. »

O tifourka da Zant-Treueur
Eun dinell 'oa en-dro d'al leur,

Ha pevar dantad-tan ouspenn,
'Pevar du d'ar hourennerien.

Hou-hou, eme ar houër war ged
Hou-hou, evel ar Chouanted :

Ha pa digorjont an dinell
War benn paotr ar gward eun niñsell⁸ ;

E-pad ar hannou an den kêz
'Uz d'ar jistr war e goazez rez

Na kleved a ree na gweled,
Stoup en e skouarn ha mouchet.

Kleved na gweled na fiñval,
Hualet 'vel eun aneval ;

An deiz war-lerh e-mêz pa'z eas
Toull e zor e wreg hen kavas.

Divenn gourennou d'ar Vreiziz,
Divenn d'ar person e iliz.

Pa oe c'hoarvezet an dra-mañ,
'Oan e Treger o studiañ.

O studiañ 'oan er skolaj
'Vid ober ma belegiaj ;

Eun den santel 'vijen-me bet,

⁸ eun niñsell : eul liñsell.

Hag eur plahig 'he-deus ma dalhet.

D'ar varzed euz ar Hreisteiz.

I

'Uz d'ar vro 'vel eur vogedenn,
Ar goañv didruez a dremen.

En oabl hudur, heolig Doue
War Dreger ne baro fete⁹ ;

Eul liñser wenn war an douar,
Erh ha skorn, ha kañv ha glahar.

Hag an avel war Menez-Bre
Bemnoz a yud 'vel ar frize¹⁰,

'Vel evn an Ankou 'pad an noz,
An avel war ar menez koz.

Neuze 'sav euz an douar-pri
An dud varo, e-mêz o zi :

Pedet, tud vad a Vreiz-Izel,
Emberr pa glevfet an avel.

Abae bloavez ar vosenn veur,
Eur goañv ken kaled, kenvreudeur :

N'eo ken ar hlozard 'kreiz ar hoad,
Nag an naered o c'hwibanad ;

Ne glever nemed ar mor braz
A lamm hag a grozmol, siwaz !

« 'Kichenn an aod d'an hanternoz,
Petra, gwregig, out o hortoz ? »

« Ma gwaz a day, ouz sked al loar,
Hag e vugale, 'maint pevar ;

Abae an abardaez 'm-eus doan¹¹,
Ouz ar garreg youh ar morvran

Klemmuz, setu ar hlaz en draouienn¹²,
Klemmuz ar houmm war-dro Loaven.

⁹ fete : feteiz.

¹⁰ ar frize : ar gaouenn.

¹¹ Notenn e galleg gand an oberour : *doan* est l'équivalent de *aon*.

¹² en draouienn : en draonienn

An deiz war-lerh pevar arched
Da gad Porz-Gwenn 'oa douget,

Douget euz an Enezenn-erh,
Eur vaouez vantret war o lerh :

Pa oa hanternoz o son,
'Oant bet beuzet 'kreiz ar mor don.

II

Eur vro, zo bet laret din-me,
Eur vro 'zo e tu ar hreiste'.

'Leh an dud a zo evuruz,
Rag an amzer vad 'zo paduz ;

Ar vro-ze ivez 'ribl an dour,
Ar mor-ze bepred glaz ha flour,

Glasoh 'vid broz en abadenn¹³
Ha flourroh c'hoaz evid seizenn ;

Dre an tonn 'n ezenn 'ra stadig¹⁴
'Vel d'e inkane eur flohig ;

Ha pa hwez an êzenn glouar,
Dreo e ruz an houl d'an douar¹⁵,

'Leh er gwez kammed an deliou
Ne wenezont, nag ar bleuniou ;

Ar bleuniou bepred 'zo kempenn,
Hag eno 'tiskviz ar gwenen¹⁶.

Eul liorz dre-oll 'larfen-me,
Avalou aour, ha glaz ar gwe' :

En neiz-se an evned 'zo drant,
Hag ar merhed ivez 'zo koant.

Ken koant, ken koant, aotrou Doue,
Ken na gredfen selled oute.

D'o feunteun zantel r' hallfen mond,
'Leh d'ar pardon oll e teuont,

¹³ en abadenn : o tañsal en abadenn.

¹⁴ Dre an tonn 'n ezenn 'ra stadig (hervez an droidigez e galleg) : hag an avel, en eur redeg war an dour, a ra chourig.

¹⁵ Dreo e ruz an houl d'an douar : (hervez an droidigez e galleg) : Ha pa hwez an êzenn glouar, evel ma ruz ar wagenn war-du an aod.

¹⁶ ar gwenen : ar gwenan.

Ha neuze 'klevfen ar varzed
O kana o gwerziou brudet,

Laouen 'vel ar wennili 'nij ,
Ha muioh ar mor-trouz ne blij ;

Ar baradoz 'larfen eno,
Ma ne vije keid euz ma bro.

« Paotr-karr, war an tu all d'al lenn
Ha ne welan eur verhig wenn ?

Eur verh o kanna traou-an-dour¹⁷,
Gwenn he sae, ha bleo melen-aour. »

« Ha ne glevan eur vouez ive'
A lar kanaouenn an Êle' ? »

Mouez ar plah yaouank a glevez
A lar kanaouenn ar Werhez ;

Kollet amañ euz a bell bro
D'he bro yen e lar kenavo,

Hag a houl pe bremañ mervel
Pe gweled eur wech Breiz-Izel. »

Deus eta, merhig, 'n da vro yen
E bro an derv, tost d'ar Porz-Gwenn.

¹⁷ traou-an-dour : traoñ-an-dour.

Ar beorien

I

O tond euz a Zant-Erwan
Kent distrei da Vêzou-Bran
O tond euz ar pardon,

‘Oa eur paour koz ‘vel tosou
Azezet war e votou
E korn eur park melchon¹⁸ ;

Ha gand ar paour-kêz dall-ze
Eur plah he dorn astenne
Eur plahig unneg vloaz :

« Ma n’oe ket hoh ene re yen
Tud vad rafe aluzenn
D’ar re n’o-deus netra,

D’ar re n’o-deus er bed-mañ
Na bara na ti bremañ
Na gwele ‘pad an noz.

Da verh ar besketaerien
Lonkas eur houmm e Porz-Gwenn,
D’ar verh ha d’he zad-koz. »

‘Vel eur hloh, mouez ar plahig
Ar hened war he jodig
An naon en he halon.

‘R bloaz-war-lerh e Sant-Erwan
Ar paour dall ‘oa e-unan
E korn ar park melchon.

« Ho merh vihan, ma den kêz
Evid bezañ leanez
D’ar skol hoh-eus kaset. »

Leanez e ti Doue,
Ar sentezed, an êle’ ;
Hi ‘zo bet kemeret.

Doue ne laosk da vervel
An evnidou hep skoazell,
D’e vreur ‘ra ar hristen.

¹⁸ eur park melchon : (galleg) eur parkad melchon.

Perag an Ankou krignet
Ar bod glaz en-deus trohet,
Dero seh 'n e gichenn ? »

Ha gouelañ 'ree an den kêz.
Evid ar re yaouank rez
Euz 'r galon an daerou,

Ha gouela nezue 'zo mad ;
Med daerou 'r re goz 'zo gwad
War ar re hen tenno.

II

Eet eo merh ar pesketaer,
Yaouank 'vel eun êl ha kaer,
Eet eo d'ar baradoz ;

'Wechigou 'tay ahane
Kaer ha yaouank 'n eun huñvre,
Da weled he zad-koz.

Evurusoh ar plahig ;
E-leh bezañ pinvidig,
Eet da'n nenv ha bugel,

Hep keun d'ar bed war he lerh,
Gwenn heh ene evel erh,
Gwenn-kann he diouaskell.

Heb madou gand he hened
Kirieg da vad a behed,
'Vel freuz¹⁹ n'emaint a-vern.

Ar baourez 'zo da Doue,
He seizenn mar deu he sae
Degouez gand an ivern.

Marteze 'vel al luhed,
An tan e tize kroget,
Kroget na mouget hañ.

Gwell eo, 'ta, pesketaer koz,
Heh ene er baradoz,
He diou-askell gwenn-kann.

¹⁹ freuz : tregerieg ; frouez.

Kanaouenn evid diou vouez

Gwestad²⁰, kee gwestad, ma lestrig,
Gand ar mor war-du Annaig
Annaig.

Eur vag 'welan hag he gwern wenn,
M'ano 'glevan 'n eur ganaouenn,
Kanaouenn.

War he hoazez ar verhig kêz,
Gwalhi he zreid 'n traoñ an trêz,
'Traoñ an trêz.

Gwell 've d'hennez boueta pesked
Eged pesketa ar merhed,
Ar merhed.

Tarnijet²¹ eo evel eun êl,
He broz evel eur gammigell²²
Kammigell.

Laket evez war he homzo' :
Dre 'n aod don skiltr eo an hekleo
An hekleo.

Brao 'vo din chom ouz he harreg,
Bravoh mar deu hi 'n em beteg
'N em beteg.

Gall²³ 'ra hirvoudi war e vên,
'Leh na vin tapet birviken
Birviken.

Laket evez ouz ho komzo' :
Dre 'n aod don skiltr eo an hekleo
An hekleo.

²⁰ Gwestad : goustad.

²¹ Tarnijet : nijet.

²² eur gammigell : eun askell (er skrid-se).

²³ Gall ; Galloud.

An disparti

An Aotrou Doue r'en-devo true'
Deuz eur peher paour : « Aotrou Doue !

Euz an oabl splann 'kouezo ar stered
'Vel ma halon 'zo bet distaget :

Rag evid ar wechig diweza
Am-eus gwelet an hini gaerra,

An hini gaerra 'barz ar bed-mañ,
Ne welin ken an hini 'garan ;

Evel ar mên-bez ha yennoh 'oe
'Pad 'ruille 'n daerou 'kreiz ma ene.

Ha ne houlennet ganin, tud vad,
Ne houlennet pebez kalonad :

Hi an oll gened digand Doue
'Deus bet, me nemed argarante'.

Kaled an disparti, kenavo !
Rag an den milliget a en-dro,

Al louarn tennet dre skuill e wad,
Ha me 'vin heuliet gand ma huanad.

'Kichenn ar vered 'oan o tremen,
Klemm ar hleier o vrañsal 'kleven :

Bugale, d'am herent-kêz 'larfet
Tenna ma skabell euz an oaled :

E toull o dor eur bod ivin glaz
Evid an hini 'h a kuit, siwaz !

Ha 'benn eur pennad al liñser wenn,
D'am oll genvreudeur rafet zoken,

Rafet eur himiad 'vel d'am herent,
Bugale o c'hoari war an an hent.

Pell 'vin e-mêz ; pa vin da distro,
Bihan ha braz, hag *i* 'vo maro.

Lizer evid e hoar

Pell on bremañ ha pell da viken ;
Na te, Jnaig koant, n'em weli ken.
'Vel ma hoar az-poa ma harante',
Me da hini em-boa marteze.
Jnaig 'oa mad evidon gwechall :
Ha pedi ray 'vidon 'n eur vro all.

Ma komzan-me demeuz Annaig,
Ouzon dezi ne gomzi, Janig !
Se 've goul gand eur verh digalon
En dra galed nemed evidon.

Milliget an teodou binimuz
Ma lousajont gand eur vrud euzuz !
Na paotrig fall na diaoul ne oan :
Eun êlig 'garen euz ar bed-mañ.
'Vid karantez hi n'he-doa, siwaz,
Pa 'he-deus va laosket war an hent braz,
War eun hent hirroh 'vid an douar :
Rag ouspenn 'pado c'hoaz ma glahar.

Tost om d'an hanv-goañv²⁴ ; hag an deliou
Gweñvet a distag euz ar bodou,
Ha gand an avel 'vefont berniet :
Evel an deliou me 'vo gweñvet ?
'Ti ar re all, prim 'teuer da goz,
Primmoh 'vid na gouez er goañv en noz.
Pa bar an heol 'tigor ar bleunio',
Ha ma heolig 'zo kuzet em bro.
Ha pa diwar ar gwez an avel,
Ouz 'n avel ar maner hep skoazell.²⁵

Plijoud 'ree din selled o tiskenn
An heol skeduz e-kreiz eur goabrenn,
'Kreiz ar goabrenn karget a hlao,
Evel ouz eur palez goueliou²⁶ brao
'Vefent diframm mad 'vid ma welfer ;
'Dreg ar houlmoul a zo²⁷ eur sklêder,
Ken larfen ar baradoz digor
Pa digor ar goulmoulen he dor.
Bepred 'karan selled o tiskenn
An heol skeduz e-kreiz ar goabrenn.

²⁴ an hanv-goañv : an diskar-amzer.

²⁵ Ha pa diwar ar gwez an avel,

Ouz 'n avel ar maner hep skoazell. ? **Hervez an droidigez e galleg** : Ha pa gouez ar bodou gand an avel, ne vez ket ken gwaskedet ar maner.

²⁶ goueliou : ridochou.

²⁷ a zo : tregerieg : ez eus.

Ha da huñvre, Janig, eun devez,
Ne gredez ket ouzin-me koves,
Hag en abadenn 'n den yaouank-se
Dalhet²⁸ soñj outañ 'bar da ene :
Karantezuz m'eo da blanedenn,
D'ar garantez keun na na ve biken.
C'hoarvezoud a ra 'wechou, merhed,
D'an hini e galon 'n-eus gouestlet,
Evel ar gwenan d'al laeron mel
Laosked o flemmig 'rankont mervel,
'Wechou ahane e vez gwasket ;
Evid yac'haad biken na refet ;
Ha dre-ze, Janig, e hoar, pedi
Evel ar paourig ken na weli.

²⁸ Dalhet : kemmeska a ra Quillen **te** ha **c'hwi**.

Eur zell diwar-lerh

Ti ma zad ne oa ket pell waz²⁹
Euz an aod don, leh 'karfen c'hoaz
Kleved o hourdrouz ar mor braz.

Ha kichenn an aod ar hoajou,
Ed-du ha melchon er parkou,
War kleun ar parkou avalou³⁰,

Du-hont er geridour³¹ uhel
D'abardaez eur hlohig santel
'Vid an anaon a vrañsell.

D'ar zul goude an overbred
An dall war bazenn ar vered
'Gane ar werz nevez-savet.

Gand Annaig hag he c'hoar all
War an dosenn 'sellem gwechall
Bugale 'c'hoari mouchig-dall.

Ha da houlou-deiz ouz ar ster
'Klevem o nijal dibreder :
« Per, Per, digor d'an alhweder. »

Tro 'pad on bet e ti ma zad,
Ken evuruz 'oan hag er hoad.
Ar voualh 'hwitelle diwezad.

C'hoaz 'm-eus klevet an eostig-hañv
O leñva bemnoz : me ne ran
Nemed leñva ivez bremañ.

Tommoh ma gwad : 'm-eus peuh ebed :
Evel en eur vro villiget
On-me o leski hep sehed.

Er Gêr-Vraz zo³² trouz an ivern ;
Amañ eo da weled a-vern
Tud nehet o redeg 'vel lern.

Hag ar plahed en o zello'
Glaou-tan : sant Erwan r'am miro !
Kuñvoh e sell merhed ma bro.

²⁹ waz : tregerieg : gwaz.

³⁰ avalou : gwez-avalou.

³¹ geridour : garid an tour.

³² zo : ez eus

Ar varzed, emaint daou dri :
Evid ar re all n'ouzont-i
Nemed gevier ha loustoni :

Neuze o zoniou gwastader³³
'Kasin eur wech d'am barzed ker,
Milin, Luzel ha Kermarker.

Gouel an Oll-Zent a zo warhoaz,
Ar hleier 'deu en-dro : allaz !
Me 'gav ar hleier 'vel ar hlaz.

³³ gwastader : mantruz.

Diwar-benn eur hi

Harz ‘ta, ki mad, ouz al laeron
Hag ar ganfarded difeson.
Nemed warnon-me eur wech all.
Rag n’ on na kanfard na laer fall.

War gab o revr³⁴ e toull an nor,
Eur penn euzuz, he geol digor,
Euz treuzou an nor ne fiñve
Na da harzal ne baoueze ;

Hag eñ ‘harze ‘vel gand ar broh,
Hag e vouez skiltruz ‘vel eur hloh :
Heb aon, me ‘lar deoh, tudou koz,
N’ho-peze tremenet ‘n e rez.

Ken eun devez ‘soñjis ganin
‘Oa ‘vid lammoud gand ma ilin :
N’ on ket spontigig, me Breizad,
Mez an deiz-se yenas ma gwad ;

Gand eur Zant bennag n’ouozn ket
E skoazell pe ‘m-eus goulennet,
Ma Êl mad ‘deuas marteze,
Med eun itron gaer ‘welis-me.

Hag al loen, eun tamm mad a gi,
M’ho-pefe gwelet dre an ti
Kein al loen-ze ‘n em displega
‘Vel ‘klevas he broz o ruza ;

Skoulmet e lost evel eun naer,
Hag astennet e gorv pounner :
Gwechall pa dapen eul laz³⁵ mad
Evel-se ‘kerzen tu ma zad ;

Glaharet ‘mui ‘vid eur bugel
Goude ober fall hag a ouel,
‘Oa ledet ouz treid an itron,
Ken a strake ma oll galon.

An itron a ree d’ar hi braz
Allazig gand he dornig noaz :
« Ma’h an da gi ‘vid m’ fehejo’
D’an ti-mañ Doue r’am haso. »

³⁴ revr : reor.

³⁵ laz : trepan.

Padog³⁶, emezi, d'al laeron
Ha d'ar ganfraded difeson.
Nemed d'hemañ, harz eur wech all.
N'eus doare kanfard na laer fall.

³⁶ Padog : ? (Padoc er skrid galleg).

D'eur henvreur

I

Kelou, Breiziz kêz, euz a bell bro
Euz ar brezel am-eus bet kelo'

Ar gwas a brezel hoh-eus klevet
Abaoe ar Zaozon, ti an Durked ;

Ha war-benn an emgann diwezañ
Kalz ne ouelont ha 'tfont gouelañ.

Diskaret an dud dre an hent ru'
'Vel 'ra ar meder 'n eur park ed-du³⁷ ;

Ha tu a hleve³⁸, trohet o goug,
O stripou 'mêz, kousket war o chouk ;

Hag ar chas a-vandenn, kant-ha-kant,
O krignad pennou heb badeziant :

Pa dremener abaoe 'n emgann braz
Evel er vered 'reer sin ar groaz.

Toullerien, eur bez, gret eur bez don,
Taolet enno an dud digalon ;

D'an oll vrezelourien, toullet c'hoaz
Nemed d'ar re o gweled, siwaz !

Kollet o gweled, ar beorien gêz,
Ha teir hoarig, emaint 'n o evez³⁹.

II

Setu eur zoudard war e wele
Eun dallig evel-henn a glemme :

« Diarg ar maro ne spontan ket,
'Leh ma hortozet n'eus spont ebed ;

Ha n'am-bo keun 'bed ouz ma buhe'
Pa na zo den⁴⁰ en-deo keun din-me.

³⁷ eur park ed-du : galleg : eur parkad ed-du.

³⁸ hleve : a gleze.

³⁹ Ha teir hoarig, emaint 'n o evez : **notenn gand an oberour** : L'ambulance dont il est question ici, a été fondée dans une ville de Roumanie, par suite d'une épidémie d'ophtalmie dans l'armée russe.

⁴⁰ na zo den : tregerieg : n'ez eus den

D'an dud doaniet e teu divalo,
Divalo din-me 'teu an Anko',

Evel war eul leur ar gourenner
'Zo⁴¹ ar hreñva 'gemer e amzer.

« Gwelet ar gistinenn re daro,
Euz ar wezenn emberr hi 'gouezo

Hag 'vo dastumet war ar yeotenn,
Me 'vo moustret gand 'n dremenerien.

Na keun kennebeud d'am gweled vad,
Pa ne zistroin da di ma zad.

'Leh 'karen selled heolig Doue,
Pa ne oa kuzet ma heolig-me.

Keun ebed. Med eur beleg santel
Hogen⁴² 'houlan-me a-raog mervel,

'Vid na dremenin ket 'vel eur hi :
Ha gand Doue 'in, pa n'in ket *ganti*. »

Ken enkrezet soudard a Vro-Hall
Ken a freuze kalon ar re all.

Ne deuas ket eun tad kovesour,
Me ne laran ket eur verhig flour ;

Kovesour n'eus ket troadig ken skañv ;
Hag eun êzenn vad war an dud klañv,

Pa deuas eno an dimezell
Hag hi liou erh gwenn war bez êl

Pe 'vel ar bleuniou en eur vro yen
'Leh an avel-goañv 'hwez da viken.

D'o diou hoar en eur skuilla daerou
E lare eun nebeud a gomzou :

« O kleved hemañ o kimiadi,
Hag euz Bro-Hall 'm-eus soñj, emezi.

Daerou 'skuille 'vel eur Vadelenn ;
Ar yaouanka 'gomzas evel-henn :

⁴¹ 'Zo : Eo

⁴² Hogen : Hag e

Diwevad, ma hoar, eo kaoud true'
Ar glahar pa vez kouezet en ene.

Eun deiz 'tiwiski da yaouankiz
'Vel da vroz kaerra a-nevez giz,

D'an abardaez, goude ar goueliou.
Glaz int⁴³ bet, 'raog gweñva, an deliou ;

Pa gouezont, euz ar hoad 'teu an oll :
Ha pa'h ay da yaouankiz da goll,

Dit an dud yaouank ne gounfont ken.
Neuze, ma harig, ar binijenn. »

Ar verh yaouanka 'gomzas 'vel-se,
Hag he mouezig leun a garante'.

III

Petra 'rez war an doenn mein glaz,
Aze, ma houlm, ha n'eo ket deiz c'hoaz ;

Euz da gerhenn eul lizer 'dougez,
Euz peleh 'ta, ma beajerez ?

Bremazon er korn an oaled pri
'Oa sioul eur gevridenn o steui :

Hirie, 'mechañs, day eur helou fall,
Ar helou-mañ euz ma henvreur dall.

Ma houlmig, kemer da nij uhel
'Dreuz an heol, n'eo ket da Vreiz-Izel ;

D'am henvro kas ar zon 'm-eus savet
'Vitañ e Pariz, ar gêr vrudet,

E Pariz, ken pell euz Koad-an-Noz
Hag euz 'n ivern 'zo d'ar baradoz.

Kee 'leh 'vel kelien e lêz troet
E varv an dud, med int frealzet.

Ha d'an distro, eun deiz mar kerez
'Tu ar huz-heol 'niji, koulmig kêz.

⁴³ int : fazi : Glaz eo bet an deliou

Ar bloavez triweh ha tri-ugent

I

Petra 'zo nevez er gêr-mañ ?
Rag an oll o redeg 'welan.

An oll en o haerra gwisket :
Petra 'zo nevez arruet ?

Tud vad, ha c'hwi eet d'eur pardon :
Ne glevan ar hleier o son ;

Sioul ar hleier 'n ilizou,
Med straka 'ra ar hanoliou.

Eur marhad braz a zo du-hont
'Leh a weler an dud o vond,

Hag euz a bevar gorn ar bed
Marhadourien a zo kaset ;

Foar gaerra Treger 'deus ket brud
'Vel homañ, na kemend a dud.

Ouz ribl ar ster ma-unan-penn
An dremenidi vraz 'zellen

Euz a beb bro hag en peb giz :
Daoust ha me ne welin Breiziz.

Eun denig mad 'houlas ganin :
« Ar strêd-mañ ha me gemero⁴⁴ ? »

« Ne ouozn ar strêd 'gernerfet :
An oll strêdou am-eus kollet,

'Baoe na ouzon hini ma bro. »
An denig mad 'zo eet en-dro.

Tremenet hoh hent, tudou kêz,
'Vel ma ne vijen en ho touez.

II

Petra nevez en Breiz-Izel :
Abae n'on-me bet 'zo ken pell.

⁴⁴ gemero : gemerin , er skrid orin.

N'eo ket tri bloaz ti ar re all,
Tri bloaz divroet e Bro-Hall ;

Tri-hant bloavez ma ene paour
'Ra pinienn er purgator,

Ha pa baouezo ma foanio'
'Vo gwall diwezdad 'vid an distro,

Gwall diwezdad. Re ma amzer-me
'Vo eet gand an aotrou Doue :

An Ankou devo greet e damouez,
Ha peb unan dastumet rez.

Er vered war ma daoulin noaz,
Pa vin gwelet ouz troad ar groaz,

« Eur milliget », 'larfont neuze,
Pa « eun divroet » marteze ;

Den n'en-devo soñj, na den ebed
N' laro : « an hini dilezet ».

Karr an Ankou

I

Gwelet hoh-eus en deñvalijenn
'Barz an noz teñval eur sklêrijenn ?

Al luhed didrouz en noz teñval
'Zo eun ene kêz o klask eun all.

Klevet hoh-eus goude hanternoz,
Pa n' ganer nemed er baradoz ;

Goude hanternoz klevet hoh-eus,
Nemed en ivern pa ne ve keuz,

Evel eun diskan klevet gwechall
Eur vouezig truezuz en noz dall ?

Eur vouez-noz o houl truez, kristen,
'Zo kloh-galv eun ene o tremen.

Evel-se eur wech, ne laran gaou,
Uhel an dosenn, ar ster e traou⁴⁵,

'Uz d'ar puñs war ma hoazez eno
Me 'glevas e traou karr an Anko' :

Teir dro der an draouienn⁴⁶, ha goude
Diskargas ar harr 'traou ar mene',

E traou ar menez pa diskargas.
Setu eun niñsel war ar ster vraz.

Piou en-deus kemeret ma dorn-me
Hag en-deus ma zennet ahane ?

Sonet kloh-galv, greet al lizer-mañ,
War dorig ma hambr 'm-eus skrivet hañ.

II

'Benn eur berr amzer pa vin maro,
Ra vin kaset da vered ma bro.

Eiz⁴⁷ 'deus soñj euz ma bugalerez
'Vo dougerien, heb gwall sacherez :

⁴⁵ traou : tregerieg : traoñ.

⁴⁶ an draouienn : an draonienn.

⁴⁷ Eiz : Eiz mignon.

Rag n'eo ponner ma horv dizehet
Hag eul lodenn gaer 'vid ar preñved,

Ma horv dizehet, 'vel eur faouenn
Er hreh meinek, pell euz an aven.

Ha 'kreiz ar vered me a garfe
'Kichenn ar groaz 've toullet ma be' ;

Ha war ma hroazig ano ebed,
Na bleuniou, eur barr ivin 'proudfet'⁴⁸ :

'Pad e chomo glaz an ivin-ze,
Pedet, tudou, evid ma ene.

Gand na bedo war ma bez gwrazez,
N'he-deus leñvet hini war ma buhez :

Heb goud din m' vize ouzon glahar,
Re geuzieg 'vizen dindan 'n douar,

'Benn eur berr amzer me a gousko
'Kichenn ar groaz e bered ma bro ;

'Uz d'an iliz koz war ar hloh krenn
A sko beb mare d'ar gristenien ;

War ar hloh pa gouezo ar morzol,
Boumbell⁴⁹ ma halon ne fiñvo taol ;

War-dro hanternoz ma sav ar groz,
'Klevfet youhal war-dro hanternoz :

« Nemed d'am mamm, malloz war beb gwreg !
Ha war beb merh na zo kaloneg⁵⁰ ! »

⁴⁸ proudfet : plantfet.

⁴⁹ Boumbell : bazhoulenn

⁵⁰ Ha war beb merh na zo kaloneg : ha war beb merh na gar den ebed.

Diougan

Eur wech d'an tostig d'eur maner
'Oa o treemn eur baleer ;

Ar baleer 'oa o tremen
E diouharr outañ 'skourmjont⁵¹ krenn,

O kleved trompillou o son
Er maner 'dreg eul liorz don.

Eur gouel bennag a zo amañ,
Ankouaet ar gleud⁵² da breñañ.

Ar gleud dibrennet war he hed
Evel d'unan c'hoaz gortozet.

Ar pirhirin da vond eno,
An abardaez deut en hentcho' :

Briz-deiz ha glaz ar wenodenn,
Hag eun itron en du a-benn,

Hag er penn all an nozevez vad,
Trompillou lirzin ouz tostaad ;

Kleved an abadenn a reer,
Dre 'r prenestou, den na weler.

Bepred 'h ee an itron a-raog
Beteg an nor 'leh 'talhas krog ;

Hag eur hlohig sonas neuze
Evel re evid peb mare :

Kerkent achu an ebatou,
Nemed en neñv na oe goulou ;

Hag ar hloh nao gwech vorzolas
'Vel evid eur plahig, siwaz !

'Vel evid eur plah o tremen.
An itron en du n'welas ken.

Med abaoe evel diagent
'Mañ ar pirhirin war an hent.

⁵¹ skourmjont : fiñvont.

⁵² ar gleud : ar gloued.

Lizer euz ar gêr

Pa oan klañv-fall war ma gwele,
Heb gouzoud d'am zad, 'skrivjont se :

« Da dad ha ni, om en yhed,
Bennoz Doue, mabig karet ;

Netar a-nevez 'barz ar vro,
Nemed Annaig 'zo maro. »

Ma halon a Vreizad ‘zo leun a velkoni⁵³

I

Pa oa war ar varvskaon, he daoulagad serret,
‘vel eur gantolig koar ‘vez warnezi c’hwezet,
Pa oa ouz ar varvskaon kousket,

Serret he daoulagad, kempennet ha lirin,
Da vond d’ar baradoz, heh ene o c’hoarzin,
Serret he daoulagad ouzin,

Ma vijen daoulinet dirag he horv maro
‘Leh dour m’bize karget ar piñsin gand daero’
Ma vijen daoulinet eno.

« Pa oe paouezet mik he halon da drida,
‘Vel eur fustl⁵⁴ ‘barz an eost torret dre nerz dorn,
Morzol he halon da vralla,

Lar din, beleg ar Roh, savet an eonenn
D’he muzellou digor, hag-eñ ‘lammas war-benn
Lar din, me ray he finijenn,

Ma ano pe gand keun pe gand fae marteze
‘N he fedenn diweza, distaget heh ene,
Ma ano-me gand keun pe fae.

« Klevet ah-eus, maouez, ‘pad nozvez ar hañvou
Huanadi ar horv paour goude ar pedennou,
Kleet ah-eus e houlennoù ?

‘Vel eur gourgammig tan neuze an ene kêz
Gwelet ah-eus o klask dre an ti he farez,
‘Vel eur gourgammig tan, maouez. »

« Chomet heh-unanig ‘barz an arched en noaz,
Oll dud ar hañv pa oant dastumet en hent braz,
Chomet heh-unanig, siwaz !

Eur garlantez spern-gwenn en he gwele ganti,
Kleuier⁵⁵, eh eus koachet dindan pemp troatad pri
Eur garlantez spern ha lili.

Ha pa zerrjout an nor d’an abardaez, kleuier,
War he bez, eur verh treud, treud, pe eun êlig kaer,

⁵³ Ma halon a Vreizad ‘zo leun a velkoni : **notenn gand an oberour** : Le titre est un vers transformé du Barzaz Breiz. : Kalon ar Vretoned
‘zo leun a velkoni.

⁵⁴ fustl : freill.

⁵⁵ Kleuier : touller bez.

Pa zerrjout ar vered emberr ?

« Aotrou Doue an neñv, c’hwi hoh-eus ma hrouet,
Ha me ‘zo er bed-mañ eru paourig divroet :
Ra vezo Doue benniget !

An hentchou daou-ha-daou a zo berroh amañ,
Ma farezig kollet on ma-unan bremañ
En hent hirroh evid unan ;

Kant vloaz he-defe bevet heb gouli en he halon,
Ha me war-benn kant vloaz ma gouli ‘vo ken don :
Hi ‘zo eet gand Doue hebdon.

Ha me, ‘vel eur hi klañv taolet ‘kreiz an aven
Pe ‘vel eur bod dero trohet war an dachenn,
Perag on amañ o tremen ?

II

An heol ‘oa o kuza, hag an oabl liv⁵⁶ ar gwad
Pe ‘vel eur forn ranet gand oll skourrou eur hoad
An heol ‘oa o kuza diwezdad :

Ma kuzfe da viken heol an aotrou Doue
Ha ma veze hirie ‘n diweza abardae’,
Ma kuzfe da viken, ha me !

Ha me euz toull ma dor ‘soñjen em bro ken pell,
Pa welis o tiskenn digor e ziouskell,
Euz toull ma dor ‘welis uhel

Eun er⁵⁷ dreist ar goabrenn, klasket e hent gantañ
O tiskenn d’an douar seul dostoh seul vihan,
Er pe sparfell pe laouenan ;

Digor e ziouskell evel ar brini-mor,
An evn ‘uz da’n douar war-nij euz toull ma dor
Dalhe e ziouskell digor ;

En e benn melen-aour daoulagad eur verhig
He dremm war an tu kleiz hag he sell ken koantig,
En e benn daoulagad Naig :

Evnig an anaon na laoskas neb klemmvan
‘Pad laris *requiem* ‘vid an hini ‘geuzian,
Evnig an anaon ne gan.

⁵⁶ liv : liou.

⁵⁷ er : erer.

Requiem æternam : hag-eñ d'an neh dudi.
« Gortoz, eur bedenn c'hoaz 'garfen da deraoui :
Requiem æternam 'viti.

Al laouenan war-gresk dreist ar houmoul emberr
War sin klask e hent mad rez eun dro, diou pe deir,
Al laouenan deut da voud er.

Evnig an anaon bepred 'n eur uhellaad
'Barz ar huz-heol 'eas kuit dirag ma daoulagad.
Evn an aotrou Doue moaqrvad.

Hag eur garm ken klemmuz, pa gouezas an noz-se,
N'ouzon pe euz an neñv pe euz kreiz ma ene,`
Ar garm 'glevan bemnoz abaoe.

Noluit consolari

Ha c'hwi ho-po feiz, n'ouzon ket
En treo⁵⁸ burzuduz c'hoarvezet

C'hoarvezet 'kichenn kêr ar Roh :
Selaouet, mar pedfeh muioh.

Pa gresk ar mor d'an abardaez,
Den sioul an aod 'vel eur bez ;

E Koad-al-Louarn an avel
'Zo tavet 'barz ar gwez uhel,

Nemed ar mordrouz a glever
Hag an *Angelus* 'n iliz kêr.

« Chaseer petra out war ged
Diwezed e korn ar park ed⁵⁹ ? »

« Gortoz, etre an atrejo'
Ar hadig wenn a ra he zro ;

Rag e-mêz euz ar vengleuz
'Zo dilezet 'baoe an hent kleuz,

Dindan an douar 'zo⁶⁰ kavet
Dre dindan beteg ar vered. »

Pioum ! Paomu !. Eñ laoskas e zaou denn.
Redeg 'ree bepred ar had wenn ;

Hag hi da grapa etreze⁶¹
Eun den en du war e goaze'.

'Uz d'ar vengleuz war ar yeot glaz,
En den marteze en kañv braz.

Ken souezuz 'oa kleved penaoz
E Koad-al-Louarn da zerr-noz,

Pa gouezas serr-noz war ar hoad,
D'an denig du 'komze ar had.

En eur yez flour ha goulaouet :
Nemed an eneoù doaniet

⁵⁸ treo : tregerieg : traou.

⁵⁹ park ed : galleg : parkad ed.

⁶⁰ 'zo : vez

⁶¹ etreze' : etrezeg.

An eneoù paour ha Doue
Etre int⁶² ‘oufent ar yez-se.

Spontet an oll, na gredent ken,
Tremen eno ne grede den.

Eur wech veze klevet ar hlaz
Hag an *Angelus* ‘n iliz vraz.

Ken ‘degouezas an aotrou Mêr
Ha gantañ harserien ar gêr :

« M’oh eur gwaller p’ eur spered fall,
Tehet, ma faotr, ‘n eur barrouz all,

Eur gwaller pe eur spered klañv,
Mad ‘ve deoh c’hoari troadig skañv⁶³. »

Laouen ha ma oa ar Rohiz,
Ne laran ket ar Beuridiz⁶⁴.

‘Dreñv bered ar Roh, en hent glaz,
E parrouz Peurid, spouron gwaz :

Pa zav an noz, an den en kaon⁶⁵
A da weled an anaon ;

Breouet⁶⁶, heb lared ger ouz den,
E zellou mantret en e benn

Emañ bemnoz dre an hent don,
Ken ‘deuas an aotrou Person,

Evid kas an diaoul e-kuit,
‘Deua ‘n aotrou Person Peurid :

« En an’ Doue, ma out kristen,
Kee leh all d’ober pinijenn ;

Gand an ivern ma out leuret⁶⁷,
Diwall ‘raog an dour benniget. »

An den en du dre an hent don

⁶² Etre int : etrezo.

⁶³ c’hoari troadig skañv : mond kuit buan-ha-buan.

⁶⁴ ar Beuridiz : tud euz Peurid-ar-Roh.

⁶⁵ kaon : kañv.

⁶⁶ Breouet : *notenn gand an oberour* : Le verbe *breoui* ne se trouve dans aucun dictionnaire ; cependant je ne l’ai pas forgé : en Tréguier, il s’emploie pour dire : *rouer quelqu’un de coups*. – **breouet am-eus anezañ** signifie : *je l’ai éreinté...* Le sens de **breouet**, ici, serait donc : *brisé par la destinée*.

⁶⁷ leuret : kaset

'Zo eet war-du an anaon ;

Gand e zaerou 'vel diou ouerenn
En-doa oll glebiet ar yeotenn.

Abae n'hen gweler ken er vro,
Nag ene e goantiz varo.

An amzer da dond

Me ne ran van hag-eñ vo braz,
Ne ran van hag-eñ vo bihan,
War an daol ouz ar bara poaz
Bihan pe vraz, me ne ran van.

Da guz-heol pe da darz-an-de',
An avel 'yud a-dreñv d'am zi,
Gand peb amzer, e peb mare,
Laouen, me ne vin gwelet mui.

Ma klevan komz 'kichenn ma dor,
Komz pe hoarzin pe gizioù all,
Nemed pa ganer, me 'digor
En eñvor 'm-eus kanet gwechall.

Gwechall 'barz eur rouantelez
Den joausoh n'ho-pefe kat⁶⁸ ;
Bremañ eo mud ma halon gêz
'Vel roñsed skuiz d'o skourjetad.

Hogen n'on ket c'hoaz tost d'ar gêr.
Ha deut eo an noz tro-war-dro ;
Ar gêr 'ray 'vidon ar hleuier⁶⁹
N'e' ket toullet c'hoaz 'barz ma bro.

Hag ar steredennou kuzet
En oabl ken du hag an ivern,
Evel ar goulou 'vez mouget
Goude bet laret an overn.

Aliez e kan em ene
Hekleo an amzer dremenet,
Hag evel ar hlaz 'son goude,
Siwaz ! an amzer da doned.

'Wechou 'fell ganin eun huñvre
'N-eus ma heuliet bete Bro-Hall :
En huñvre-ze ma kredfen-me
Ha mar padfe beteg 'r bed all !

Ar vuhez, pe vez hir pe berr,
Du-hont 'afen hep soñj ebed ;
'Vel ar pesketaer dre eur ster
Heb gouzoud, ha war draou⁷⁰ bepred ;

⁶⁸kat : kavet.

⁶⁹ ar hleuier : an touller beziou.

⁷⁰ war draou : war-draoñ.

Gand ma vo *hi* ouz ma gortoz
Youl ma Doue ra vezo greet !
'Benn 'vin ganti er baradoz,
Pell 'vo ma spered 'm-bo kollet.

An angelus

Din, din, din... an *Angelus* :
Mouez ar hlohig 'zo klemmuz
D'an *Angelus*.

Din, din, din... n'e' ket ar hloh
'M-eus klevet bemnoz er Roh
N'e' ket ma hloh.

Din, din, din... en Breiz-Izel
'N *Angelus* hag-eñ 'vrañsell
Em Breiz-Izel ?

Gwechall 'oa gwerz an Êle'
En iliz 'kanem neuze
Gwerz an Êle'.

Gwechall, en amzer goz,
Pa beden-me deuz an noz
En amzer goz.

Ma hoantig⁷¹ 'm-eus gortozet
'Kichenn an dour benniget
'M-eus gortozet.

Hag evid eur hoaradenn
Em have c'hoaz en arbenn,
Eur hoaradenn.

Kee goustad, war da zeulio'
'Vel eun ene paour m' yelo
War da zeulio'.

Eviti *De profundis*
'An da lared 'n eun iliz,
De profundis.

Pegoulz 'klevin *din, din, din*
Klohig ar vro 'kana din
E *zin, din, din*.

⁷¹ Ma hoantig : ar plah a garen.

Gousperou an anaon

I

Eun nozvez a viz Gwengolo
'Oa tan ha kurun en neñvo',

Eur gwall-amzer, 'vel 'm-eus gwelet
En aod Penn-Marh hag e Geoded,

Ken 'grene log ar pesketaer
Ha 'krene mui e wreg er gêr.

'Kreiz al luhed hag ar gurun
Pa oan-me krog em henta hun,

Eun huñvre deut euz Breiz-Izel
'Diouganas ma bro o vervel.

An Arvor dilezet a-grenn
'Vel ar faou brein 'ribl an aven.

Ostizez Bear 'treuz he dor,
A houlenne gand ar hoador⁷²

Gand ar hoador o vond en kêr,
Glaou en e garr leun a zeier :

« Ma den mad, o redeg ar vro,
Klevet ah-eus piou 'zo maro ?

Karrigell an Ankou fenz
'Zo tremenet a-dreñv d'ar hloz. »

« N'eo ket a-dreñv d'ar hloz, maouez,
Na kennebeud dre an hent rez

Eo karr an Ankou tremenet,
Dre an neñvou ne laran ket ;

Dindan bolz an neñvou fenz
'Oa trouz meur 'uz da Goad-an-Noz :

An Ankou krignet war e garr
'Zo eet en-dro war-du Bear.

H agoude Bear, dre ar vro
An Ankou en-deus greet e dro.

⁷² ar hoador : ar hoador.

Brañsellet kloh an anaon,
Ha 'kreiz peb iliz ar varvskaon,

Ar goulou krog ouz peb aoter,
Heb beleg, kolist na soner.

War ar bed 'vo eur gwall diroll,
Marteze Breiz 'zo 'vond da goll. »

Evel-se 'komze ar hoadour
D'an ostizez o kerhad dour.

A bevar gorn Arvor neuze
'Oe war-zao 'n eur ober eul le,

Sonet ar varn 'vid Breiz-Izel,
Mond d'he obidou kent mervel,

'Oe war-zao ar re 'oa Breiziz
Evid mond da vez ar gêr-Iz :

Pevar, ha barzed o-fevar,
Unan euz Leon, den klouar ;

An eil a Dreger, eur paotr sonn ;
Eun all a Gerne, tomm 'vel tonn,

Hag eur paotr gouez euz a Wened :
Pevar, ar re all Gallaoued⁷³.

Eun dra vurzuduz e vije
Da weled ar pevar den-ze.

D'o gweled eno o-fevar,
D'an hanternoz, e skeud al loar,

Dirag puñs Kêr-Iz war an trêz,
'Kichenn kêrig Douarnenez :

Ar mor 'vid arched Breiz-Izel,
'Vid goulou ar stered uhel,,

Hag evid beleg 'oa Doue,
Ha kanerien ar varzed-se.

Neuze gand eur mordrouz bennag
'Oe damgwelet o tond eur vag ;

Ha pa stokas d'an aod eno,`

⁷³ Gallaoued : Galianed, hervez ar skrid e galleg.

Euz an tramor 'oa, eur Himro.

Ha c'hoaz burzuduz kalz muioh
Da gleved o tiñsa eur hloh,

Eur hlohig o tiñsa 'n eun tour,
En touriou Kêr-Iz 'kreiz an dour.

Ha 'barz ar mor glebiet e zorn,
Ha greet sin ar groaz, paotr 'n Elorn

'Grogas 'n eur hlemmigan er giz koz,
Mud ar mor ha sioul an noz :

« Abaoe an êlez villiget
Euz an neñv m'int bet diskaret.

Doue 'n-eus taolet o zelenn
D'an douar, 'vid on hanerien.

Hag on zadou-koz evel-se
Pa oa dalhet o bro oute,

Dindan ar goueliou war ar mor
'Dreuz ar mor o tond en Arvor.

Ken klemmuz hag an tonn 'kanent,
Ya, ha 'veulent Doue 'velkent.

Emgann aliez o-doe bet
Ha mervel peb gwech m' veze red :

A-raog mervel 'youh ar bleizi,
Evel an er⁷⁴ on barzed-ni.

En on hozni ma om gwasket,
Eostiged Breiz ne davfont ket.

Euz an dud vad ne vo eñvor
Pa vo torret telenn Arvor.

Ha piou 'veulo Doue amañ
Pa vo eet Breiz-Izel ahann ? »

'Pad *in exitu* ar Vreiziz
E tiñse ar hloh e Kêr-Iz.

« Nann, ma breudeur, eme eun dall,
N'eo ket Arvor eet d'ar bed all ;

⁷⁴ an er : an erer.

Ha mad 've lared ar *gredo*
Or-boe desket gand on zado'.

Doue da genta, Breiz goude,
Gand feiz, fiziañs ha karante' ;

Ken gwir hag an heol lugernuz,
Doue ha Breiz a zo paduz ;

Kdeid 'vo war an aod eun daolvên,
Hag e tiwano eun dervenn,

An dero 'barz ar hoadou braz,
Ar brug e lanneg, hag ar groaz,

Keid 'vo eur groazhent en he sao
Hag uhel ar hleun er parko',

Keid 'traillo ar mor an avel,
Biken ne varvo Breiz-Izel. »

Ar re all 'lavaras *Amen*
Ouz ar Menez-Hom o tremen,

Eur baleer o klevoud se
En brezoneg, ne reas van deze⁷⁵.

Evid an deirved gwech, siwaz !
Klohig Kêr-Iz 'diñse ar hlaz,

A diñse ar hlaz diweza
'Vid Breiz 'oa daro da goueza ;

Hqag al loar 'guzas eur pennad,
Amzer fall 'savas eur barrad.

Gand ar houn 'deue klemm ha trouz
'Vel ra eur hlañvour war e blouz.

Gwasket o halon d'ar re-mañ,
Miserere 'laras unan,

Eñ 'laras eur *Miserere*
'Vid e vroig a dremene :

« Tud vad, mar plij, eur bedenn verr
'Barz an ti-plouz hag er maner,

⁷⁵ deze : an dud-se (a oa e-kichen).

Pep tu d'ar vro, d'an abardae'
Laret teir gwech ar *Hirie*,

Eur *Hirie* 'vid ar beorien
N'o-deus na kerent na bro ken.

Soñjet ennom 'n ho pedenn :
Euz 'r malloz, Doue ho pellao ;

Evid ma n'erruo ganeh⁷⁶
Beza distaolet a beb leh,

Na mond ha dond war douaro'
'Leh 'vid beva n'vez ken ho tro ;

Eur bedenn d'ar re divroet
Evid d'ho tro ma n'vefet ket.

Ni 'zo 'vel pemp a vugale
War-lerh o mamm 'oa eet eun de'

War-lerh o mammig d'ar vered,
Hag int en o hañv ken mantret,

'N em daolas er bez war he lerh,
Goloet o-hweh 'n park ar herh⁷⁷.

Dim-ni ne vo na keun na kaoñ⁷⁸
Er bed fall-mañ 'zo 'vond d'an traoñ.

War bellaad euz ar baradoz
Ha war izellaad 'vel an noz.

Ra prim on hemero Doue,
Re gwallet ha re skuiz ive'.

E *Miserere* achuet,
Kirie teir gwech 'zo laret.

N'eo duzed⁷⁹ na korrigoz noz
'Weler evel d'an amzer goz ;

Ar horrigou en abadenn
O koroll en-dro d'eun daolvên ;

⁷⁶ ganeh : ganeoh.

⁷⁷ park ar herh : **notenn gand an oberour** : On désigne ainsi, au pays de Tréguier, les cimetières éloignés du bourg. Certaines paroisses, dont les morts n'avaient plus une demeure suffisante autour de l'église, leur ont acheté pour nouvel asile un terrain extérieur où croissait naguère l'avoine ou tout autre blé. Et l'appellation ci-dessus, sans avoir une raison générale, s'explique par extension.

⁷⁸ kaoñ : kañv.

⁷⁹ duzed : korrigez.

Mar n'int korrigoù na duzed,
Eneou paour ne laran ket.

Euz a bleg ar mor 'savont oll,
N'eo ket 'vid c'hoari pe goroll

'Teuont 'mêz gand o niñsel wenn
En o eskern eur grenadenn.

Ha neuze an anaon kêz
Sioul, sioulig, dre an trêz,

En-dro d'an dour ar re veuzet,
Evel tud ar hañv d'an arched

Pa ganer *in paradissum*,
Deuz an aod bete Menez-Hom

Ha dirag toull-bez ar gêr Iz
'Oe klemmganet *de profundis* :

« An Arvor 'zo eet da gousked,
Ahane ne dihuno ket ;

Ne dihuno ken on mammig :
Lallazig, lalla, lallazig ;

Tavet ho korn-boud er mene',
Eet eo on mamm war he gwele.

Ar re bremañ o-devo o zi
War douar ar Vreizidi

Gand enor m'o dalhfont bepred,
Rag an Arvor 'zo benniget ;

M'hen dalhfont evel kristenien
En on bered 'vefont zoken.

Pa vi dre an aod, baleer,
Kee goustad, amañ e kousker ;

Goustad 'vel 'kichenn eur havell,
'Vid na dihuni Breiz-Izel

A zo bet taolet 'mêz he zi
Ha beuzet en aod 'vel eur hi ;

Goustad, ha selaou, baleer,
Ha marteze 'klevi emberr,

Pa vo ar morvran tavet mik
E-kreiz ar mordrouz eur zonig :

Klemm an anaon 'vo honnez.
« Selaou son an anaon kêz. »

Ar pedennou peurlavaret,
Eun alarh gwenn a zo laret

'Oa gwelet, eun alarh gwenn-kann
A-uz d'ar mor o nijal skañv,

Skañv ha seder 'vel eur goulmig
Hag eñ ken lirzin e vouezig.

Ha digoret an oabl abred
Gand eun tarz-kurun hed-ha-hed,

Evid degemer eun ene,
Ene 'n Arvor an alarh-se :

Eno 'c'hoarient soniou kaer
'Vel ograou iliz-veur Gemper.

« Lar din-me, pesketaer, da biou
Al lestrig 'zo o vond d'an traou⁸⁰. »

« N'eo ket mare ar vordidi⁸¹ ;
Ar re-ze pemp kevreur int-i.

Laket ho mamm gante 'n he bez
O vond da glask o bez ivez,

N'eo ket tramor war an douar :
Neb douar n' guzfe o glahar ;

Ne stokfont en douar ebed,
E puñs ar mor don e vo red.

Hag int 'vond e-biou, me oar vad,
O kana ar *Magnificat* :

Ar zon-ze beteg on rehell
Hag 'vo war rehell Breiz-Izel.

II

⁸⁰ d'an traou : d'an traoñ.

⁸¹ vordidi : ar verveidi.

Ha me ivez war hent ma bro ;
N'eo ket evid lod euz he mado'

Eur mabig ankouaet ganti
'Korn an iliz 'ay da bedi.

Goude Pontreo ha Plouzal,
Tremenet Peurid, 'oa noz-dall :

N'in ket 'vel eul laer 'kreiz an noz,
Amañ 'azezin war ar roz,

Euz al leh 'welis aliez
Tour hag iliz ha tiegez,

Tiegez ar gêr ha bered :
'Vid an noz-mañ n'o gwelan ket.

C'hwez vad deue euz an draouienn,
C'hwez ar bleuniou gand an dosenn,

Bleuniou n'ouzon ken o ano,
'Vel den ma hini 'barz ma bro.⁸²

Ha kollet ar houlz euz ar bla⁸³,
Nevez-amzer nag hañv ne oa ;

Ne oa na mare nag amzer :
Ne vorzole ken ar hleier,

'Vel ar vuhez da virviken
Ar hleier ne vorzolent ken.

Hag eñ 'mañ an deiz o sevel
Gand ar vrumenn a zav uhel,

Hag eñ eo an deiz, ar vrumenn
A zav du-hont euz an draouienn.

N'o-deus ket kanet ar higi,
Na dre an hentchou ar hirri ;

Ne gan na kigi nag evned.
'Mañ ar vrumenn 'uz d'ar vered.

Ha neuze me welas eur verh,
Eur verhig en gwenn evel erh,

⁸² den ma hini 'barz ma bro : den ne oar ken ma ano 'barz ar vro.

⁸³ bla : bloaz.

Digor he divreh war he be' ;
Digor ar vered 'viodn-me.

Ha p'am-eus tostaet eno,
Hi 'blegas 'ti ar re varo,

Kempennet evid eureujiñ ;
Ha me stouet war ma daoulin,

Rag Annaig 'zo dimezet
Hag an Ankou 'zo he fried.

Pedet 'm-eus 'vid an anaon ;
Med ne bedin ken evidon :

Frealzi ne ra pedenno'
'Vid boud karet eur horv maro.

Pa on bet savet alese,
En ivin eun draskig 'gane.

Ar vêzidi 'oa er parkou
Hag ar hirri dre an hentchou.

Ar beleg 'daol war an arched
Eun tamm pri ha dour benniget ;

Ma oll daerou 'm-eus skuillet-me,
Ha prennet ma halon ive'.

Taolet an alhwez er vered,
Da diweza p'am-eus laret,

Laret da goantiz an Anko' :
« Kenavo, Niag , Kenavo, »

Mar deo eun huñvre kement-mañ,
Kalz a zo gwirionez ennañ.